


DIELLOÙ



Lizher Anjela Duval da Ronan Huon.

“Nag a blijadur am eus bet o resev ho lizher.”

Traoñ an Dour, gwener da noz

Aotrou Rener,

Nag a blijadur am eus bet o resev ho lizher. Bennoz evit ho hetoù.

Me d’am zro a lavar deoc’h ivez : bloavezh mat hag evurus, yec’hed ha prespolite hag ar baradoz e fin ho puhez ! ,vel ma vez laret dre amañ.

Kaset em eus d’an dimezell L’Hostis ho parzhoneg « Aod » peogwir oa an droidigezh da heul. Kaeroc’h eo sur « An Treitour » ha bez am eus an destenn e brezhoneg war : Evidon va-unan ». Met va meno eo. Marteze eo abred dimp displegañ mennozhioù broadel war ur gelaouenn o tont er bed. Furoc’h eo gortoz gwelout petore danvez a rai ar re all.

Evit “Ar skluzioù” n’am eus ket an destenn vrezhoneg rak n’on ket koumanantet d’Al Liamm. N’am eus ket komprenet mat mat eta? Daoust m’am eus kavet kaer ar pezh. Moarvat eo re arouezel evit va spered togn. Ar skluzioù vefe „Les Barrières sociales? pe ar Reizhadur ? pe betra ?

Ar pezh a lavarit din eus Avaloù « an aotrou Danno en doa lavaret evel doc’h. Laket am eus anezhañ e galleg. Marteze e vo sklaeroc’h. Moarvat e-keñver ar „syntaxe“ brezhoneg n’eo ket reizh tre va frazenn. Met ar stumm da gomz eo dre amañ. Lavaret e vez da skouer : Emañ lein war an tan.

Emañ ar big war veg ar wezenn. Emañ an dour o virviñ. etc...

Ar sujed eta a vez war-lerc’h ar verb. En « Avaloù » eo Hervez (ur paotrig) ar sujed. Gwir eo pa vez ur verb e deroù ar frazenn e vez alies heuliet eus a dost gant ur verb all. Da skouer :

Emañ Jan oc’h arat.

Emañ ar c’hi oc’h harzhal, etc.

Ar gerioù pe an doare-lavar :

„Her dra ma c'hell“ e vez implijet dre mañ e giz-mañ : hertañ ma c'hell. hertañ da dalvezout : gwashañ. Ne vez ket kavet ar ger-se er geriadurioù met bet eo dastummet moarvat. Gwelit Barr-Heol Niv. 31 Mezheven 1962 pajenn 62.

Ar verb fraoñval am eus ranket implijañ dre ziouer a unan all kreñvoc'h. Klasket hag adklasket am eus en aner ur verb a rentfe an drouz hag ar fiñv a ra ar wezenn hejet gant nerzh. N'am eus kavet nemet fraoñval.

Kas a ran deoc'h “Va zi”- “Hunvre” a zo echu ganin ivez. N'oa graet nemet un tamm e pep penn c'hoazh p'edo bet an Aotrou Klerg amañ. Lavaret en doa : un dra bennak zo e-barzh.

P'edo respontet an dimezell L'hostis, mar bez plijet gant hon labour e kasin keloù deoc'h.

Kenavo 'ta ha mil bennoz, rai a ran ur bern charre deoc'h.

Gant va gwellañ hetoù a vloavezh mat.

Anjela Duval